

KANNADIG

IMBOURC'H

Kelaouenn Emglev An Tiegezhioù niv. 60 Meurzh – Ebrel 2009 Priz : 2 €

Ar Pab lakaet da c'hedour

Ur vro, pa gasan warni ar c'hleze, e kemer tud ar vro un den en o zouez hag hel lakaont evito da c'hedour. Pa wel ar c'hleze o tont war ar vro, e son ar c'horn da reiñ keloù d'ar bobl. Neb a glev son ar c'horn ha na ziwall ket, mar teu ar c'hleze d'e dapout, e wad war e benn a vezo. Son ar c'horn en deus klevet ha n'en deus ket graet a van : e wad warnañ a vo ; m'en defe taolet pled, e vuhez en defe saveteet.

Met ar gedour a wel ar c'hleze o tont ha na son ket ar c'horn, hag ar bobl n'eo ket bet degemennet, hag e teu ar c'hleze, hag ez eo tapet unan bennak, an den-mañ en abeg d'e bec'hed a vo tapet, met e wad digant ar gedour a c'houlennin.

Yehezkael 33, 2-6

En ur glevout er mare-mañ ar c'hunujennoù a bep seurt taolet a vil vern war gorf ar Pab Benead XVI en abeg d'un nebeut komzoù bet distaget gantañ, er c'harr-nij hen kase da Afrika, pa responte da aters ur c'helaouenner gall a-zivout ar sapre stevell¹-komzoù ha n'o deus ket plijet d'ar C'hallaoued pergen -, em eus soñjet e teree mat-tre an arroudenn-mañ eus ar Bibl, tennet eus Yehezkael, ouzh ar gobidell-mañ.

Evel ur gedour dibabet e c'heller sellout ouzh ar Pab : seniñ a ra ar c'horn en ur lavarout ar wirionez war ar c'hleze-se a zerc'houez ar “sida” ; ne ra nemet e labour gedour. N'eo ket eñv ar muntrer met ar re ne fell ket dezho e sonfe ar c'horn, hag int-i, a ziskouez evel-se, ez int mevelion sentus da Briñs ar bed. Diouzh e du e oar mat ar pab-gedour e c'houlennno an Aotrou Doue outañ gwerzh ar

gwad m'en devo lezet da skuilhañ en ur chom hep ober labour, seniñ ar c'horn, pegen bras bennak e vefe niver ar bleizbroc'hed² a laka an hu warnañ.

Ha ni Kristenion “*lambda*”, petore emzalc'h kemer er gobidell ? Huchal gant ar bleizbroc'hed evit bezañ gant liv an amzer, pezh a ra lod siwazh, pe harpañ ar Pab en e roll gedour ? Harpañ anezhañ evel-just ! Met ivez e c'heller kemer an amzer da brederiañ un tammig war ar saviad m'en em gavomp enket ennañ e derou an 21-vet kantved-mañ evel ma rae Yann Maneguen en e bennad “*Efedoù Mae 1968 war ar stuzegezh*”, embannet e-barzh *Kannadig Imbourc'h* niv. 57.

Petore dazont emamp o vont da lezel d'hor bugale ha bugale-vihan ? Kavout a reer tud a-walc'h evit lavarout emamp o vont da zistrujañ an natur gant an arvevlazhioù³, an OGM hag an temzoù kimiek ; da zistrujañ ar c'hoadeier dre o dreistkorvoñ ha war un dro gant al loened a vev enno ; da zistrujañ ar gwelead ozon gant an aezhennoù Co² a wered hon tankirri ; da zistrujañ... n'ouzon petra c'hoazh... met, tra iskis, kavout a reer nebeut-tre a dud evit lavarout e vez distrujet ar familh gant an difealded etre ar priedoù, atizet maz eo gant an dirollerezh revel, skignet evit un darn vat gant ar skinwel, tud ar *show-business* hag ar fiñvskeudennerezh, kemeret o buhezegezh da skouer gant an dud, evel-just. Ha koulskoude, kreñvaet e vez ur vro gant tiegezhioù

¹ Stevell : *préservatif*.

² Amañ ne skrivan ket « *bleizj* » rak ul loen hael eo ar bleiz evidon

³ arvevlazh : *pesticide*.

stabil enni⁴, hag ar vugale evodet eus an tiegezhioù-se a savo tiegezhioù stabil d'o zro⁵ mar bez roet dezho pennsturioù divezel reizh a zo lezenn Doue e gwirionez, pezh ne reer ket evel-just pa lezer dasparzhañ stevelloù d'ar vugale er skolajoù ha liseoù.

Evel ur bongoal⁶ republikan ha laikour ez eo deuet da vezañ ar revelezh dirollet ha digabestret, evel m'eo bet lavaret meur a wech gant Youenn Olier en e *Notennoù Politikel*. Ur gwir andizalc'hadus⁷ ez eo deuet da vezañ, gounezet dre ur stourm kalet gant ar bobl, evel an 35 eurvezh labour dre sizhun pe an ehanoù-paeet. Neuze arabat touch ouzh ar gwir dreist-se, seul vui maz omp aveet, forzh penaos, gant un arm difaezhus a-enep d'ar viruzenn : ar gapotenn⁸ !

Diouzh un tu all, e welomp ar gouarnamantoù oc'h ober o seizh gwellañ evit ober d'an dud paouez butuniñ pe evañ alkohol. War pep pakad sigarettennoù pe boutailhad gwin, bier pe wiski ez eus ur frazenn evit ho lakaat war evezh eus an dañjer. Lu a-walc'h eo zoken ar c'homzoù skrivet bremañ war ar pakadoù sigarettennoù, ken ez eus tu d'en em c'houlenn ha n'eo ket graet a-ratozh-kaer evit na vefe ket dalc'het kont anezho evit gwir, rak taosoù pounner a vez war pep pakad gwerzhet hag ar remañ a gouezh ingal e kef ar Stad. "*Fumer tue*" a lenner e galleg war pep pakad a zo e gwerzh er C'hwec'hkogn. Piv a gredo e varvo unan goude bezañ bet butunet ur sigaretenn ? Hini ebet ! Dreistarver⁹ ar butun hepken a c'hell lazhañ un den, evel dreistarver an alkohol. En enep, arver ur stevell hepken - unan siek, da vihanañ - a c'hell degas ar marv d'un den, ha koulskoude n'eo ket skrivet war ar pakadoù stevelloù "*Fouzhañ a lazhañ*". N'on ket aet da wiriañ war ar pakadoù evel-just, met mar bije skrivet e vije gouezet.

Pezh am eus klevet avat digant un apotikerez bet

⁴ Klevout a reer bemdez e vank ranndioù evit lojañ an dud, met evit un tiegezh stabil eo trawalc'h ur ranndi, gant un tiegezh diempret ez eus ezhomm daou ranndi peurliesañ.

⁵ N'eus mui plas er prizonioù, a glever ivez, met e-touez an dud karc'hariet ez eus kalz tud yaouank evodet diouzh tiegezhioù diempret e-lec'h ne rene nag an emglev nag ar garantez etre ar gerent.

⁶ Bongoal : *dogme*.

⁷ Andizalc'hadus : *inaliénable*.

⁸ Ar bruderezh evit ar gapotenn a zo gantañ stummoù lu a-wechoù, evel ar stevelloù ramzel-se gwisket war golonenoù, o terouezañ ur c'hale'h, ez eus bet e Paris hag e kêrioù all. En ur gêr ez eus bet tud evit enebañ memestra ha regiñ ar stevell ramzel e kont. Maer ar gêr-mañ (n'ouzon mui pehini eo) en deus graet prosez d'an disenterion hag ez eus bet ur barner evit kastizañ anezho gant un tell-kastiz pounner.

⁹ Dreistarver : *abus*.

aterset e-kerzh unan eus ar restadennoù skinwel a oa bet graet da geñver ar gobidell-mañ a-enep d'ar Pab eo ez eo diogel 100% ar stevelloù kenderc'het ha lakaet e gwerzh er mare-mañ. Koulskoude, en ul lizher-digor a oa bet kaset da Venead XVI d'ar 24 a viz Meurzh 2009 gant pevar skiantour : Bernard Audoin, rener erounezet ar *Sidaction*, Françoise Barré-Sinoussi, loreadez ar priz Nobel mezekniezh 2008 war ar sida, Jean-François Delfraissy, rener *Agence nationale de recherche sur le sida et les hépatites virales*, hag Yves Lévy, kadoriad Kuzul skiantel ar *Sidaction*, e oa ur pezh anzavadenn en degouezh-mañ. Setu un tamm anezhi : "*Dielfennadur bloc'hel ar 140 pennad skiantel bennak gouestlet da heuliañ ar c'houbladoù ma oa seroberzhel¹⁰ ennañ unan eus an daou berzhiad a ziskouez en un doare anfreuzadus ez aotre arver ar stevell da zigreskiñ 90 % d'an nebeutañ ar riskl da dreuzkas ar VIH*".

Kevaotet eo bet al lizher-mañ war ar mod yaus evel-just, met nec'hus un tammig memestra eo koustiañs vat ar pevar skiantour, chom a ra 10 % eus an degouezhioù ma n'eo ket bet spirus a-walc'h ar stevell. Evit keñveriañ, ijinit ur gwiskamant a-enep d'ar skinadurioù ha na vefe efedus nemet evit 90 %. Piv a rafe ar bruderezh evitañ ouzh tud a labour, da skouer, war lec'hiennoù darnod derc'hanel¹¹, en ur lavarout dezho : n'eus riskl ebet war-bouez 90% eus an degouezhioù ? Den ebet evel-just, dre ma chom 10 % a chañs da vezañ skindaget¹².

Aet eo ar Pab da lavarout d'an Afrikiz ez int denion koulz hag ar re all, ket ardivinkoù revel. Gant ar revelezh e tleont kaout emzalc'hioù kiriek, soliet war ur retvez a fiziañs kengred etre ar priedoù. Ezhomm ebet a stevelloù etre ar priedoù mar chomont feal an eil d'egile. Ar stevell efedus betek 100 % ez eo ar garantez wirion etre ar priedoù hag an dirwest evit an dud yaouank. Ar broioù afrikat o deus bet ar gwellañ argiladur eus ar sida a zo ar re o deus ambrouget o diarbennnoù yec'hedel gant koulzadoù erziwall a-bouezh a-enep d'al lieswregiezh hag a-du gant ar fealded hag an dirwest. E broioù evel Ouganda ha Botswana, e-lec'h e oa 15 % eus ar boblañs taget a-raok, ez eo digresket da 5 % bremañ. Setu ur skouer a c'hell Afrikiz reiñ dimp, met ne vez ket klevet gant ar skouarn-se er C'hwec'hkorn, nag en un darn vat eus Europa, tud sklerijennet maz omp-ni.

¹⁰ Seroberzhel : *séropositif*.

¹¹ Darnod derc'hanel : *expérience nucléaire*.

¹² Skindaget : *irradié*.

Ent-diac'hinadek, e vije bet klevet gwelloc'h an areizh-mañ er Stadoù Unanet. *"The Pope may be right"* (Gant ar Pab e c'hellfe ar gwir bezañ) a dalbenne ar *Washington Post*, kelaouenn bemdeziek bras an tu kleiz amerikan, en hec'h embannadenn eus an 29 a viz Meurzh 2009. Harpañ a rae ar gelaouenn-mañ he c'homzoù war studienn an Doktor Edward Green, penn-imbourec'her e Skolbenn Harvard pa skriv : *"Ur fed eo, pa soñj an dud e vint gwarezet mat oc'h implij ar stevell, d'an nebeutañ un darn eus an amzer, en em ouestlont en ur revelezh muioc'h risklus"*. Pezh a adkaver, skrivet hogos heñvel d'an 30 a viz Meurzh, e pajennoù an *Union*, kelaouenn bemdeziek nemeti Gabon : *"Reiñ a ra ar stevell ur surentez faos d'an dud. Soñjal a reont, gant ar stevell, e c'hellont dizañjer mont a gleiz hag a zehou, hogen diwir eo"*.

Da heul ar gobidell-mañ hag ar pennadoù lies bet embannet er c'helaouennoù, a-du pe a-enep, ez eus bet ivez meur a lenner en deus skrivet ul lizher d'e gelaouenn voumoun evit reiñ e soñj dezhi hag a veze embannet er rizhtalbenn *"Lizhiri al lennerion"*. Setu unan am eus kavet reizh a-walc'h : *"Ar Pab n'eo ket un den politikel a glask plijout da zilennerion, evel Nicolas Sarkozy pe Barack Obama : emañ aze evit dec'hervel gourc'hemennoù Doue ha kealiadurezh a-viskoazh an Iliz. D'an den eo da zibab, dieub maz eo, penaos ren e vuhez. Ar gwir gudenn ez eo en deus an den kollet pep skiant eus e atebegzhioù. Hag er gevredigezh danvezelour a vevezerezh a zo hon hini, e fellfe dezhañ ober pep tra ha n'eus forzh petra, hogen gant bennozh ar Pab"*.

En tu all d'an holl difreterezh-se a-enep d'ar Pab, lakaet a gostez, ez eus marteze ur vent all d'an darvoud. Kement hini ac'hanomp a fell dezhañ digeriñ e zaoulagad a wel pegement eo bet kemmet an traoù hag ar bed e-kerzh ar c'hwegont bloaz bennak diwezhañ ha n'eo ket kemmet war an tu mat siwazh. An areizh kefridiel a gomz dreist-holl eus kevergolloù¹³ dre ar bed, a vefe degaset dre ma ne vez ket doujet a-walc'h d'an amvevad¹⁴, met un doare all a zo marteze da welout an traoù, rak an Neñv a hañval bezañ mennet da ober ar *"forcing"* evit hor gouzaviñ¹⁵. Leun eo ar gib, dic'hlannañ a ra zoken, a lavar deomp an Aotrou Doue dre c'henou un toullad tud dibabet dre ar bed a-bezh, ha dreist-holl er Stadoù-Unanet er mare-mañ. Mar ne

¹³ Kevergoll : *catastrophe*.

¹⁴ Amvevad : *environnement écologique*.

¹⁵ Gouzaviñ : *avertir*.

baouezet gant ho oberoù fall ha drouk, ha mar ne zistroit ket d'ur vuhez reizh, me zo o vont da skeiñ, a lavar dre vras ar gouzavadennoù. N'on ket o vont da zisplegañ deoc'h pep tra dre ar munud met kemerit amzer da vont war al lec'hienn <http://apparitionsmariales.org/> hag e vo tu deoc'h da ober ho soñj.

Breizh n'eo ket bet ankounac'haet gant ar gouzavadennoù-se peogwir hon eus bet Kerizinen¹⁶ e Breizh-Izel, hag a-raok, e Breizh-Uhel ez eus bet Mari-Juli Jahenny, ar varzhc'houliadez¹⁷ eus Blaen, er barrez e-lec'h m'emaon o chom abaoe pemp bloaz ha tregont. Meur a wech e-touez al lies diskuliadurioù bet roet d'ar welourez-mañ eo bet anv eus ur Pab en defe kalz da c'houzañv. E-pad ur mare zoken e oa skrivet war he bruched *"Dieubidigezh ar Pab"* gant ur marzhc'houli¹⁸.

An Tad Bourcier – Doue d'e bardono - a rae war-dro santual ar Froudeg, e-lec'h ma oa bet ganet Mari-Juli, a grede start e selle an diskuliadurioù-se ouzh Yann-Baol II, dreist-holl abaoe ma oa bet tennet warnañ e Roma war leurenn St Pêr gant an Turk Ali Agça. Met marv eo Yann-Baol II, ha war ar marc'had e voe kentoc'h degemeret mat ar Pab-se, dre vras, gant ar bed, dre ma oa bet marteze gwelet evel unan en doa kenoberiet da ziskar ar gevunouriezh. Gant Benead XVI ez eo disheñvel an traoù, kerkent ez eo bet taget, dre ma oa un Alaman marteze ; *"Panzer Kardinal"* e oa bet lezanvet endeo. Setu perak em eus soñjet kerkent, pa oa an tagadennoù a-enep dezhañ en o c'hreñvañ, e c'hellfe bezañ anv eus ar Pab-mañ pa gomze Mari-Juli Jahenny. El lec'hienn am eus meneget uheloc'h ez eus gouzavadennoù a ra ivez anv alies eus Benead XVI. Hervez diougan Sant Malaki¹⁹ Armagh (1094-1148), e c'hellfe Benead XVI bezañ zoken ar pab eil diwezhañ eus an diougan... Piv 'oar ?!

Da c'hortoz darvoudoù all, n'eus ket ezhomm eus an diouganoù evit krediñ ez eo gwall hejet an Iliz gant nerzhioù an Droukspered, hag e vo muioc'h-mui c'hoazh er bloavezhioù da zont.

Donwal Gwenenez

¹⁶ Lenn en niv. 48 p. 6 komzoù an Itron Varia e brezhoneg e 1956, hag en niv. 50. Da notiñ ivez ez eo bet aotreet lidañ an Oferenn gant Eskob Kemper ha Leon, evit ar wech kentañ d'an 23 a viz Ebrel 2006.

¹⁷ Marzhc'houliadez : *stigmatisée*.

¹⁸ Marzhc'houli : *stigmaté*.

¹⁹ Mael Maedoc Ua Morgair, e anv iwerzhonek, hervez *Encyclopadia Britannica*

Gwallvrokadenn Nancy Pelosi er Vatikan

En ur lezel a-gostez gobidell ar stevell e plijfe din displegañ un nebeut notennoù war gwallvrokadenn²⁰ Nancy Pelosi er Vatikan e-lec'h e weler e vez klasket a-wechoù kred ar Pab gant politikerion 'zo.

Kadoriadez Kambr an Derc'houezourion eo Nancy Pelosi, da lavarout eo an trede tudenn-stad en USA. Katolik eo, emezi, met a-du gant ar sioc'hanerezh. E miz Eost 2008, da geñver *Kembod broadel demokrat* he doa diskleriet d'an NBC "ne c'helle nag an Iliz na den ebet lavarout pegoulz e teraoue ar vuhezden", un doare dezhi da reizhabegañ ar sioc'hanerezh, en ur venegiñ zoken komzoù St Eosten, ar pezh a zegasas tousmac'h an eskibion amerikan.

D'an 18 a viz C'hwevrer 2009 e kemere perzh Nancy Pelosi en ur veaj kefridiel en Italia. He c'huzulierion war ar c'hehentiñ o devoa prenet eviti deglev²¹ gant Benead XVI. Sklaer e oa o raktres kehentiñ : fistilhat a reer war traoù zo ha traoù all ; tennañ a reer ul luc'hskeudenn vrav gant Nancy Pelosi hag an Tad santel warni ; keveliñ a reer war an dodenn-mañ : degemeret eo bet gant kalz hegarated gant ar Pab – sellit ouzh al luc'hskeudenn pegen mousc'hoarzhuz ez int ! – pezh a dalvezo da lavarout e c'heller bezañ ur gatolikez kredourez ha pleustrerez, ha war un dro kas war-raok ar sioc'hanerezh : ar Pab a zo "OK" war an dra-se !

En un doare disheñvel e tremenas an traoù : ne badas an deglev nemet pemzek munutenn, ket unan ouzhpenn. Unan eus ar re verrañ bet marilhet gwech ebet eo bet, evit un dudenn bolitikel eus ar seurt-se ; hag ouzhpenn e c'hourc'hemennas ar Pab : "Luc'hskeudenn ebet !"

A-boan peurechuet an deglev e tegouezhas keladur²² kefridiel Roma a-zivout ar gejadenn. Ne rae nemet resisaat dichek en deus tennet splot Benead XVI eus an degouezh-mañ evit gouverkañ d'e ostizez : "Lezenn naturel ha kelennerzh a-viskoazh an Iliz e keñver briegezh buhez mab-den, adal e hiladur²³ betek e ziwezh naturel, a redi da bep katolik, ha dreist-holl an dezvourion, ar wiraourion hag an atebion bolitikel, d'en em glevout gant an dud a youl vat evit diorren ur stern gwiraourel reizh da wareziñ ar vuhez en hec'h holl brantadoù". *Punto e basta !*

²⁰ Gwallvrokadenn : *mésaventure*.

²¹ Prenañ deglev : *obtenir audience de quelqu'un*.

²² Keladur : *communiqué*.

²³ Hiladur : *conception*.

Kennaouerion²⁴ Nancy Pelosi, tapet berr ha dislavaret-naet a brientas well-wazh ur c'heladur truezus hep an disterañ damveneg d'ar gwall "rebech" (anvadur ar wask amerikan). Ar gelaouennerion c'hodisus en em c'houlennas ma oa bet Benead XVI ha Nancy Pelosi en hevelep deglev. Er c'heit-se e oa deuet ar c'hennaouerion da vezañ pounnerglev pa glasked gouzout hiroc'h war ar gobidell-mañ.

Tomm eo bet d'he feskennoù (se a lenner er wask US), c'hoarzhadeg da heul hag un arouez sklaer a-berzh ar Vatikan da amaezhiadurezh Obama : "Fellout a ra deoc'h ober brezel ? Evel ma plijo deoc'h, hogen arabat deoc'h kemer ac'hanomp evit beulkeed !

"Casus belli" evit Iliz Amerika

Eus petore brezel e vefe anv ? *Les catholiques et Barack Obama : c'est la guerre !* a skrive Daniel Hamiche e pajennoù *Monde et Vie*, 4 a viz Ebrel 2009, niv. 809.

Kenoberiet he deus, mui pe vui, an Iliz amerikan da drec'h Obama. Paz eo bet danzeet gant lies kombodoù eus Kembod an eskibion an diell *Forming Consciences for Faithful Citizenship* (Stummañ an emskiantoù evit keodedelezh ar feizidi), a voe skignet e miz Du 2007, e sell da servij da ziell-stur evit dilennadeg ar bloaz war-lerc'h, e voe graet en un doare ken luziet ma tegasas ur c'hemmeske kefredel ha divezel e-lec'h tizhout ar pal gortozet : stummadur un emouezadur²⁵ reizh.

Bez' e lakae an diell-mañ war an hevelep pazenn difenn ar vuhez da c'henel ha dinac'h ar brezel direizh en Irak, nac'hadenn dornataerezh kelligoù-egin²⁶ ar grouecell ha difenn ac'haez an arouelioù²⁷ mezegel evit an holl, distaol an dimeziñ heñvelreviat hag arc'hadur muioc'h a zenelezh e trinerezh²⁸ an enbroidi, dinac'h klonadur an eginelloù²⁹ denel hag ar retvez da stourm ouzh an enkadenn armerzhel. A-benn ar fin e kemmeske an diell-mañ goulennoù "ankevraouadus"³⁰, da lavarout eo penndalc'hel evit dibab un danvez kannad, ha goulennoù "kevraouadus" ne engouestlont ket koustiañs an dilenner. Frankaet ha

²⁴ Kennaouer : *communiquant*.

²⁵ Emouezadur : *prise de conscience (concrète)*.

²⁶ Kellig-egin : *cellule-souche*.

²⁷ Arouelioù mezegel : *soins médicaux*.

²⁸ Trinerezh : *traitement*.

²⁹ Eginelloù : *embryons*.

³⁰ Ankevraouadus : *non négociable*.

durc'haet gant levezon divent ar meziennou amerikan, dre vras eus an tu kleiz, e tevoudas ar c'hemmesk-mañ an disoc'h er gwostou³¹ a anavezet. Touiñ a reas renerezh Kembod an Eskibion evel ar vran e mojenn Yann ar Feunteun ne vo ket tapet a-nevez ken, met un tammig re ziwezhat e oa. Abaoe ar 4 a viz Du diwezhañ ne baouez ket an eskeb da reutaat o emzalc'h e-keñver an amaezhiadurezh nevez, en ur stadañ n'eus netra vat da c'hortoz digant ar vandenn a zo o paouez ober hec'h annez an Ti-Gwenn.

D'ar 16 a viz Genver 2009, 4 devezh a-raok digorlid an arlevierezh nevez e skrivas ar c'hardinal George da Obama evit e lakaat war evezh : 1) arabat touch d'an arbennerzh a goustiañs evit koskor ar yec'hed a nac'h pleustriñ sioc'hanadurioù ; 2) arabat kemm ar "*Mexico City Policy*" ma nac'h drezi an amaezhiadurezh amerikan kellidañ, gant kevalaoù ar Gevreadiezh, ar sioc'hanerezh en estrenvro ; 3) arabat noazout d'an diferadurioù e-talvoud, a denn da nac'hañ d'ar gouarnamant ar gwir da gellidañ pe da vroudañ dornataerezh kelligoù-egin ar groueell. Ne respontas ket Obama dre lizher d'ar c'hardinal. Dre c'hreadoù eo henn greas kentoc'h.

³¹ Gwost (benel) : *urne électorale*.

D'an 23 a viz Genver e sine Obama un *Executive Order* (deved prezidantel) o tiskar diferadurioù ar "*Mexico City Policy*" ; d'ar 24 a viz Meurzh e kemenne an Departamant-Stad e oa ur skodenn gevreadiezhel a 50 milion \$ war-nes bezañ grataet da C'hlad ar Riezou Unanet evit ar Boblañs (ar wezhouri³² a gas war-raok ar sioc'hanerezh en Tred-bed) ; d'ar 27 a viz C'hwevrer, e roe da c'houzout Maodiernezh³³ ar Yec'hed he c'hoant da ziskar kement diferadur a wareze an arbennerzh a goustiañs, ar pezh a reas d'ar c'hardinal George diskuliañ d'ar 17 a viz Meurzh dirouderezh³⁴ amaezhiadurezh Obama etrezek ar "mac'homerezh".

D'an 9 a viz Meurzh, e aotree un "*Executive Order*" kelliderezh, war kevalaoù kevreadiezhel, ar c'hlonadur denel, e-sell da "enklaskoù".

Kompren a reer gwelloc'h bremañ pezh a c'heller envel *CASSUS BELLI*.

Yann MIKAEL

³² Gwezhouri (benel) : *officine*.

³³ Maodiernezh (benel) : *ministère*.

³⁴ Dirouderezh (gourel) : *dérive au sens de déviance*.

Perak n'on ket tomm ouzh mennozhioù Charlez Darwin

Ar gouelioù a lider war an ton bras er mare-mañ e koun daou gantved ganedigezh Charlez Darwin a guzh penn-da-benn fedoù pouezus-tre a-zivout e vuhez hag e oberenn skiantel.

Da gentañ, Darwin n'en deus ket ijinet damkaniezh an emdroerezh : prest e oa houmañ da vezañ serret gantañ dija, evel kelennadurezh ezoterek e oberenn e dad-kozh Erasmus Darwin, hag evel martezeadenn skiantel e menegoù diniver strewet e levrioù Aristotelez, Sant Tomaz Akwino ha Goethe, e-touez re all.

An nevezenti nemeti krouet gantañ a voe kinnig un displegadenn evit penaos ha perak an emdroerezh-se - met faos a-grenn e oa an displegadenn. Den ebet hiziv, e-touez diskiblion emc'hourbannet Darwin, ne gred en "dibaberezh naturel" evel keflusker d'an emdroerezh. An damkaniezh diouzh ar c'hiz hiziv, an "neodarwinouriezh", a lavar n'eo ket un dibaberezh tuet davet gwellaat ar spesoù eo a ren an emdroerezh, met kemmoù dre zegouezh penn-da-benn. Kement ha ma ouzon, kemmoù dre zegouezh a zo kontrol-mik da geal ul lezenn naturel a c'haller displegañ ez-skiantel. An darwinouriezh a

zo ur mennozh fu ha mil stumm dezhi, na c'haller ket breutaat warni ez-sirius : bewech ma vez paket e-harz ar voger gant un enebadenn nevez e kemm stumm hag e tec'h kuit en ur ganañ trec'h. Gwir, an dra-se a c'hallfed lavarout diwar-benn kalz traoù azeulet er bed arnevez, met an darwinouriezh a zo an hini nemeti a voe divezh a-walc'h evit treiñ d'ar c'hontrol-rik ha mirout an hevelep anv.

An holl re a gemer perzh el lid meur darwinour (an neodarwinourion ivez) a ra fae war geal an "*design speredek*", a zo brizh-skiantel hervezo. Gant Darwin e-unan e voe ijinet ar mennozh-se avat. Sklaer-tre eo kement-se e paragrafoù diwezhañ *Orin Ar Spesadoù*, ul levr em boa bet lennet gant kalz aked ha karantez em c'hrennardiezh, ken e oan bet troet d'un darwinour baranek, ha tachtet poltred ar Charlez kozh war moger ma c'hambr, henviled war e dro (mont a rae mat ganto, feiz). Nevez 'zo, ul lenner hegarat en deus graet din ober anaoudegezh gant studioù John Angus Campbell war ar b-"prezegoniezh e skiantoù an natur". Dielfennañ a ra peseurt binviji a vez arveret el levrioù-skiantoù evit kendrec'hiñ. En ur video, dedennus ur souezh, hag a c'heller arvestiñ outañ war

<http://www.youtube.com/watch?v=esXHcinOdA>, e tispleg ar c'helenner-se penaos an "design speredek" n'eo ket hepken ur glokadenn-eviltechiñ e damkaniezh Darwin, met ivez ur rakkredenn-diazezh strewet un tammig e pep lec'h e argurzenniezh *Orin Ar Spesadoñ*. Neuze ez eo an "design speredek" al lodenn nemeti eus damkaniezh Darwin a zo c'hoazh hiziv difennerien dezhi : hag ar re-se a zo enebourion washañ d'an darwinouriezh.

Heverk ha souezhus eo, a-dra-sur, gwelout un den, ijinet gantañ un displegadenn c'hwitet evit un damkaniezh a oa dija anezhi a-raok, bezañ mil veulet evel krouer an damkaniezh-se ; souezhusoc'h c'hoazh gwelet diazezenn bennañ poellad Darwin o tremen hiziv evit kontrol-mik an darwinouriezh.

Farsite, a-hend-all, eo ar striv graet e pep lec'h evit kuzhat ar c'houbi-da-ouennlazhañ a zo enbarzhet en doare-poellañ-se. Pa anzav meulerion ar skianter breizhveuriad, gant keuz, e voe "arveret" an darwinouriezh evit reizhabekaet ar ouennelouriezh hag ar yoc'hlahzadegoù, eo ramzel-euzhus o filpouserezh. An damkaniezh-se a zo gouennlazhourez en he c'hreiz donañ, n'he devoe ket ezhomm da vezañ distreset gant diskibled difeal evit treiñ d'un dra all. Sellit ouzh troidigezh ar paragrafoù-amañ-dindan gant Charlez Darwin, lenner, ha lavarit din hag-eñ ez eo ur poellad digablus a voe ret distummañ *a posteriori* :

« En ur marevezh eus an dazont tost (ket gwall bell ma vuzulier anezhañ e kantvedoù), gouennoù sevenekaet (*civilized*) mab-den a gaso da get ar gouennoù gouez e pep lec'h. Ar varmouzien hañval o stumm ouzh hini mab-den, ivez, a vo lazhadeg et ha kaset da get, a dra-sur. Brasaet e vo neuze ar pellder etre ar gwir zenion hag o adstummoù izel : e-lec'h kaout, evel hiziv, un troc'h etre ar vorianed pe an Aostralianed hag ar gorilhed, e vo un troc'h etre marmouzien izel-izel evel ar babouined, ha denion sevenekaetoc'h c'hoazh (spi am eus) eget an Europiz (*caucasian*) a hiziv (...) »

Ijinit, e-pad ar mouezhiadegoù norzhamerikan, re tu John McCain o c'hourbann ez eo heñveloc'h Barack Hussein Obama ouzh ur gorilh eget e gevezer republikan !

Kenderc'hel a ra e giz-se : « Pa sellomp ouzh ar bed en dazont tost, diniver e vo an holl ouennoù izel bet kaset da get gant ar gouennoù uheloc'h ha sevenekaet! »

Hag evit echuiñ, ur galv sklaer da argas ar re a zo a re :

« Ar ouezidi en em zisamm buan eus ar re a zo gwan a gorf pe a spered ; hag ar re a chom a ziskouez peurliesañ yec'hed start. Ni avat, en tu sevenekaet, a ra hor seizh gwellañ evit paraat an naetadur naturel-se : sevel a reomp ospitalioù evit an inosanted, ar re wan pe ar re glañv, lezennoù a grouomp evit gwareziñ ar re baour; hag hon mezeion a labour start evit mirout bev an dud betek an eilenn ziwezhañ ... Evel-se e lezer lodennoù gwanañ ar gevredigezh sevenekaet da strewiñ o spesad. Neb en deus studiet desavidigezh gouennoù loened ne c'hall ket tremen hep soñjal ez eo fall-tre an dra-se evit gouenn mab-den. Souezhus eo pegen buan ez a da fall ur ouenn-doñvaet pa ne vez ket graet (pe graet fall) war he zro ; met den ebet n'eo bet digas a-walc'h evit lezel al loened gwashañ da ober re vihan-nemet e degouezh mab-den ».

Merkit mat : n'on ket a-enep martezeadenn an emdroerezh. Diwar ar pezh am eus gallet gwelout betek-henn, e kav din ez on an hinienn nemeti e-mesk an holl dud a anavez an a-bell pe a-dost, hep tamm soñj ebet hag-eñ eo c'hoarvezet pe get an emdroerezh. An holl dud, war a seblant, o deus ur gredenn bennak er par-se, ha prest int da lazhañ pe da vervel eviti. Kredenn ebet ganin.

Ma n'em eus netra da ginnig a-zivout ur gudenn (a zo diziskoulm hervezon), n'eo ket evit keloù-se ne c'hellan ket merkañ diboellded kredennoù ar re a ginnig. Abaoe pell 'zo em eus komprenet ez eus nebeutoc'h a fiziañs c'hoazh da gaout er skiantourion eget er bolitikerion, ha klod iskis Charlez Darwin ne ra nemet kretaat an dra-se. N'eus nemet ma boazamantoù fall a vir ouzhin a bakañ krog e gouzoug an darwinerion ha goulenn diganto :

« Perak kement a drouz en-dro da Charlez Darwin ? Ijinet en deus an "design speredek", a gasait, hag ijinet en deus an dibaberezh naturel, a zo faos hervezoc'h. Prezeget en deus gouennlazherezh ez-fraezh, ha c'hwil a vez heuget gant ar gouennlazherezh, a-hervez. Evit meuliñ anezhañ, ez eo bet ret deoc'h krouiñ eus an netra un dudenn kontrol d'ar pezh a voe Darwin ez-istorel. Ne welit ket ez eo kement-se-holl ur pezh farserezh ? »

Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant Ewan Delanoy, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Por que não sou um fã de Charles Darwin*, niverenn an 20 a viz C'hwevrer 2009

Katyn

E 2006 e oa bet savet ur film nevez, « Katyn », a oa bet kaset da benn gant Andrzej Wajda. Trizek sal hepken o deus kinniget anezhañ e Frañs a-bezh e-penn kentañ miz Ebrel diwezhañ. Ha div hepken e Breizh : « Les Studios » Brest hag ar C'hKatorza en Naoned. Ha c'hoazh ! En Naoned ne chomas war roll ar filmoù nemet ur sizhunvezh ha ne vo gwelet nemet gant nebeut a dud, kristenion dreist-holl, me laka, pa oa bet brudet e zonedigezh war skrammoù Frañs gant ar gelaouenn gatolik nemeti ha na ra ket freuzstal e Frañs : « Famille Chrétienne ».

Ger ebet gant ar meziennoù eta. N'eo ket *politically correct* komz eus al lazhadeg-se a 22.000 ofiser poloniat, bet mennet, kaset da benn ha kuzhet mat goude-se, gant ar gomunisted Rusian, an N.K.V.D., ken abred hag e 1940, da vare an emglev etre Berlin ha Moskov e penn kentañ an eil brezel-bed. N'eo ket *politically correct* brudañ ur film a gomz eus lazhadeg begenn ur bobl katolik evel Polonia, seikont vloaz 'zo. Aesoc'h eo skeiñ war ar gatoliked hag o fab. Ma ! Va gwreg ha me a reas hor soñj da vont d'ar C'hatorza da welout ar film-se.

Iskis e oa dimp ar soutanennoù a oa o vont tre e sal-teñval 6 ar C'hatorza en deiz-se. N'eur ket boas ken ouzh ar soutanennoù, neketa. Hag o vont e-barzh d'hon tro – ne oa ket ur mor a dud -, e weljomp un toullad mat a c'houzougennoù roman. Lod eus ar re-se a oa o chapeled ganto en o dorn, o pediñ didrouz da c'hortoz ar film. Un iskis a daolenn, pa lavaran deoc'h.

N'emaon ket o vont da reiñ ur varnadenn eus ar film : n'on ket gouest. Gouzout a ran hepken ez eo bet loreet kenañ (Erer ar film poloniat gwellañ e Polonia, priz an Heklev-mat e FilmFest Washington D.C., er Stadoù Unanet, priz an Heklev-mat e Gouel ar sinema etrevroadel e Lubiana (Slovenia)). Savet e oa bet treslun ar film

diwar darvoudoù gwirion, war am eus lennet. Gwell a-se, rak eus istor eo ez eus anv ha n'eo ket eus ur roman deuet diwar ijin dreist ur skrivagner bennak. Gwir eo ar pezh a zo er film. C'hoarvezet eo, ha c'hoarvezet gant munudoù braouac'hus. Heuliañ a reomp evel-se e Polonia un tiegezh e-kreiz ar brezel. An tad kelenner skol-veur kaset d'ur c'hamp bac'h en Alamagn an Nazied, ha marvet eno nebeut goude, ar mab ofiser karc'hariet gant komunisted an Unvaniezh Soviedel, ha lazhet, ur boled en e glopenn, ha stlapet e gelan en ur foz a-gevret gant degadoù a re all, un tourter o c'holeiñ anezho kerkent gant ur gwiskad douar e-kreiz Kerneblec'h, 'kosteiz koadeg Katyn.

N'eo ket *politically correct*, hiziv c'hoazh, komz eus euzhusterioù diniver ar renadoù komunour dre ar bed (meur a gant milion a dud lazhet), nag eus an diforc'hañ-bugale (50 million bep bloaz), na nebeutoc'h c'hoazh eus an hilastaliñ a aotren d'an dud en em lakaat mistri war deroadur ar Vuhez. Ouzh moger an nann-*politically correct* e oa e Breizh un den en e sav ha, diwar-benn Katyn, en doa lavaret fraezh ar wirionez war Feiz-ha-Breiz. An Aotrou Perrot an hini e oa. Kement-se, ha kalz traoù all, sur-a-walc'h, en ur c'hornad-bro komunour, e lec'h e oa paotred ar strouezh en o c'hreñv, a dalvezas dezhañ mervel. Abalamour da betra ez eo bet muntret an Aotrou Perrot eta ? Abalamour d'ar Wirionez. Ar Wirionez war bep tachenn, hini Breizh, a zistaole he Feiz hag he yezh, evel-just, hini an Istor kempred ivez gant Katyn, hogen ivez ha dre vras an hini war Mab-den, den-a-Zoue ma oa. Gouzout a rae e oa e mar bras da vezañ lazhet evel ur c'hi. Asantet en doa da vont da heul e Vestr, en doa lavaret sklaer « *Me eo an Hent, ar Wirionez hag ar Vuhez* »...

T. Gwilhmod

A-nevez diwar-benn an Aotrou Perrot e-pad ar brezel

Un diell verr a vo kavet bremañ amañ da heul, bet sonenrollet ganin e tro ar bloaz 2000 pe 2001, oc'h atersiñ an Aotrou Louis Lalouer, eus Gouenou, un niz d'an Aotrou Perrot. E galleg e oa ar gaoz, nemet ar pezh a zo gant lizherennoù stouet.

« Lavaret en doa an Tonton d'hor mamm, e 1941, kas dezhañ daou pe dri mab, evit un nebeut devezhioù, a-benn disammañ anezhi un tammig. Ha neuze, an tri breur, omp aet du-hont, ha Tad en

doa lavaret da Jean, ar mab henañ, me 'm oa pemzek vloaz d'ar poent se e 1941, hag eñ en doa 18. Tad en doa lavaret dezhañ : « Ne chomi ket amañ, ret e vefe dit klask tizhout Norz-Afrika hag ar Jeneral de Gaulle. Arabat dit chom gant ar Voched amañ. »

Neuze omp erruet eno (e Skrigneg), ha Tad en doa lavaret « Goulenn a ri ali Tonton Jean-Marie, lavarout a ri dezhañ da vennad » (mont d'an Afrik da gaout ar « Frañs Libr »), hag an Tonton en doa

respontet dezhañ : « *Paotr, ar Frañs bremañ 'n eus ez-homm martoloded ha soudarded* ». Da lavarout eo e oa a-du. »

Pa oa kaoz er gelaouenn-mañ, bloaz 'zo, da c'houzout petra oa emzalc'h an Aotrou Perrot e-keñver an Alamaned ha « Paotred ar Strouezh » e oa aet an diellig-mañ penn-da-benn diwar va soñj. Diwar lakaat urzh em burev am eus he c'havet. Diskouez a ra, ma c'heller fiziout en hini a zo bet aterset, n'edo ket an Aotrou Perrot a-enep « de Gaulle » nag ar « Frañs Libr ». En e garg a berson hag a rener « Feiz-ha-Breiz », e ranke teurel evezh da c'hellout kenderc'hel gant e gargoù, met, ken abred ha 1941 da vihanañ e wele mat ne c'helle ket padout pelloc'h yev an Alamaned war ar vro, betek reiñ e ali a-du gant e niz, un ali a gonte kalz en amzer-se netra nemet dre ma oa hini ur beleg doujet en e familh. Tud all, tost d'an Aotrou Perrot, digarg ha kalz yaouankoc'h avat, evel Youenn Souffez (lenn en niv. 20 ur pennad diwar e benn) ha zoken niz an Aotrou Perrot, a zo aet eta war var o buhez da sikour ar C'hallaoued da c'hounit ar brezel.

An dra-se avat, ne vir ket ouzhimp-ni, broadelourion, da zerc'hel soñj, evel ma lavaras

Roparz Hemon diwezhatoc'h, e rene « *un avel a frankiz* » en Emsav e-pad ar brezel, pa oa izel kribell ar Jakobined, n'o doa ket gelllet, daoust d'o strivoù, mirout ouzh emled an embann er prantad-se, ouzh an abadennoù brezhonek kentañ er skingomz, ouzh krouidigezh ar skol hollvrezhonek kentañ « Skol Blistin », ouzh embannadur ar sizhuniég kentañ « Arvor », Ololê ha kement 'zo.... Ken izel e oa gant an dud an emskiant eus o gwir vroadelezh a hend-all, ma oa diaes-tre d'an Emsaverion, anat eo, gounit o fobl d'o uhelvennad, pa ne oant ket komprenet, ha bepred e riskl da vezañ sellet outo evel « kenlabourerion », pezh a goustas e vuhez d'an Aotrou Perrot, a-benn ar fin.

E zever en deus graet an Aotrou Perrot gant e niz, en ur chom hep e zialiañ : un akt bihan a « rezistañs ». Unan all, pouezusoc'h en defe graet, pe get, gant soudarded saoz ? Kalz ne vern : graet en defe, hogen graet en defe heñvel moarvat o skoazellañ Alamaned pe Breizhataved war var eus o buhez, se a ranker merkañ. An dever a gristen n'eo ket mirout hepken evit mat ur gostezenn hepken !

T. Gwilhmod

“Windtalkers” Breizh

Taolenniñ a ra ar film amerikan « *Windtalkers* », bet kaset da benn gant John Woo, emgann an enezenn japanat Saipan. Kontañ a ra meurzaneevell an Amerindianed Navac'ho enluet en arme amerikan e-pad an eil brezel-bed ha kefridiet d'ar staeloù obererion skingomz. Bez' e tiogele arver o yezh rouez ar c'hehentadurioù dre skingomz, dre ma oa ar Japaniz dic'houest da gevezhañ ar c'hemennoù bet daztapet³⁵ ganto. Evit o gwarez pe kentoc'h hini an nodeg³⁶ e oa ambrouget pep Navac'ho gant un Ael-mat (Nicolas Cage ha Christian Slater er film) a zlee kousto pe gousto gwareziñ buhez an Amerindianed-se, ha ma oa ur riskl bennak e kouezfe e Navac'ho etre daouarn Japaniz e tlee an Ael-mat-se en em dreuzfurmiñ en Ael-drouk : war nep priz ebet ne zlee an nodeg en em gavout etre daouarn an enebour.

Mar ne fazian ket, e oa bet kontet traoù damheñvel gant Goulven Pennaod, en un danevell a dremene en Indez-Sina e-lec'h en doa servijet el lu gall a-enep d'ar Viet-minh, ha bet embannet gant Al Liamm, tregont vloaz zo bremañ, pe muioc'h marteze. Komz a rae eus traoù heñvel c'hoarvezet

du-hont, hogen ar yezh arveret ar wech-mañ ne oa ket an navac'hoeg met ar brezhoneg, ha ne oa ket bet aozet en un doare ken reizhiadek moarvat ha gant an Amerikaned. Forzh penaos e tlee an disoc'h bezañ heñvel, rak sur-mat ne zlee ket hor yezh bezañ komprenet gant kalz tud eus ar broioù-se.

Emañ o paouez dont er-maez eus an embannadurioù *LaVauzelle* ul levr gant ar jeneral gall Patrick Manificat : “*Propousk ! Missions derrière le rideau de fer (1947-1989)*”. Bet sinet e miz Ebrel 1947, ez aotree an emglev Noiret-Malinine da 18 milour gall (6 ofiser ha 12 isofiser) pep a b*Propousk* (“aotre-tremen” e rusianeg) dezho, da redek-diredek dieub en tachad gouzalc'hidigezh soviedel en Alamagn. An hevelep aesterioù hag ar C'hallaoued o deus bet ar Vreizhveuriz hag an Amerikaned. En eskemm o deus gelllet Soviediz kas tud dezho en tri zolead dalc'het gant ar re-unanet. An darvoudoù dianav-se eus ar brezel yen eo a gont levr Patrick Manificat.

Hervez termenou an emglev-se, e lakae an Arme Ruz e gourc'hemenn ar vilourion c'hall pemp ti a lorc'h (digresket da zaou goude 1958) e Postdam, hogen ne vint ket arveret kalz en abeg ma oant

³⁵ Daztapet : *intercepté*.

³⁶ Nodeg : *code*.

treuzadus a-walc'h gant ar servijoù titouriñ soviedel ha reteralaman. Da Verlin-Kornôg e voe staliet gwir karter-meur an MMFL (*Mission militaire française de liaison en Allemagne de l'Est*), he diazez a-dreñv, a-benn ar fin. An darempredoù dre bellgomz etre Postdam ha Berlin-Kornôg a veze selaouet evel-just gant ar Rusianed, hag ez eo aze ma kont an aozour, penaos e c'hoarvezo d'ar C'hallaoued arverañ gant gwidre **milourion vrezhonegerion** evit rouestlañ ar Rusianed.

Fentus e vefe an istor mar ne ziskouezfe ket ne vez doujet d'hor yezh kenkoulz ha da yezhoù an Amerindianed, nemet pa vez ur mad bennak da dennañ diouto evit ar re hon dalc'h dindan gazelgæ. Ha pa ne vez mui ezhomm anezho e vez ankounac'haet pep tra, ha dreist-holl e vez kendalc'het divorc'hed gant argerzh distrujañ ar yezhoù-se.

Diouzh un tu all, eo bet diskouezet meur a wech an heñvelidigezh etre degouezh an Amerindianed hag hini ar Vrezhoned. Soñj am eus dalc'het eus ul luc'hskeudenn vrudet ma weled warni Indianed sirius en o gwiskamantoù hengounel, renket kichen-ha-kichen war div renkennad - en o c'hoazez en hini a-raok, en o sav-son en hini a-dreñv - evit tennañ o foltred, hag a geñveried gant ul luc'hskeudenn all, Brezhoned warni, en o gwiskamant hengounel ivez, renket heñvel, da geñver un eured moarvat, e dibenn an 19-vet kantved pe e derou an 20-vet. Bez' e vije bet tu da ober ur gensturienn heñvel a-dra-sur gant tud eus ur bobl all eus Europa gozh - Kreizeuropa da skouer -, bet miret ganto o gwiskamantoù hengounel e-pad pell, met evit pezh a sell ouzh ar yezhoù e vije bet un tammig diaesoc'h marteze.

Yann MIKAEL

Gwenvidigezh ar baourentez

"Eürus ar re baour" (Mazhev 5)

Lavaromp diouzhtu ez eo Jezuz ar Paour. Mab Doue en em c'hraet den, a ziskoach dimp un Doue n'eus netra dezhañ nemet ar pezh a ro a-zornadoù. N'eo ket plijus bezañ paour ; an holl beorion a zo ali gant se. Hag ar C'hristen a zle stourm a-enep d'ar baourentez ouzh e vougañ : an dibennoù-miz tenn da skoulmañ ganto ; ar gouel-Mikael tu ebet da baeañ ; an dleoù diwar ar c'hred oc'h en em verniañ ; strivañ a-enep da baourentez diharz kevandirioù a-bezh.

An holl a zle bezañ paour. Den ebet reuzeudik avat. An Aotrou Krist n'en deus ket lavaret ez eo ar baourentez hec'h-unan ur wenvidigezh. Fellout e ra dezhañ nemetken digeriñ hon daoulagad war dremmwelioù all ; re ar Rouantelezh. Eñ e-unan ne glaske ket ar baourentez eviti hec'h unan. Dav eo eta ober mat an diforc'h etre paourentez ha kaezhnez. Pa lavar an Aotrou *"Gwenvidik ar re baour"*, n'emañ ket o reiñ ton d'ar reuzeudigezh. Ar reuzeudigezh a flastr. Ar gaezhnez a freuz. Meizomp eta ar pezh a fell da Jezuz lavarout, pa gemenn : *"Eürus ar re baour..!"* Lavarout a ra ivez : *"D'ar re baour ez eo embannet ar C'heloù Mat."* Evel-se e krogo gant e gefridi.

Paz eus anv gant hor Salver eus "tud-paour" emañ gantañ an *"enavim-ed"* en e spered. Er Bibl, "peorion Yahwe" a zo an dud vezhekaet, an dud krommet dirak rogoni an dud c'halloudus. Hag a zo int-i, en abeg d'o stad c'hoantek, war-c'hed eus an

dieubidigezh prometet gant Doue. Ar re-se a asant da vezañ salvet gantañ.

Merzomp n'eo ket a-walc'h gant an Aotrou lavarout : *"Eürus ar re baour !"* N'eo ket ne vern peseurt peorion ! "Ar re baour a galon." Evit gwir, ez eus reoù-paour, c'hoant ganto hepken dont da vezañ pinvidik. Ha gouzout mat a reomp-ni ma teu ar re baour da vezañ pinvidik hag ar re binvidik da vezañ paour e vo heñvel-mik ar stal, o kenderc'hel d'en em zianavezout, d'en em gannañ, d'en em zisprizout, er warizi hag en doug d'an arc'hant. Hon hendadoù henn gouie ervat ; ganto e oa ar c'hrennlavar-mañ : *"Ar paour, pa binvidika, gant an Diaoul ez a"*.

E spered Jezuz, hervez ar Bibl, an hini paour a galon, a spered, eo ar c'hreder dezhañ daou emzalc'h : an emzistag diouzh pep preder a binvidigezh, hag an dienez war an dachenn divezel ha kravezel. Ac'hale e tarzhe an ezhomm d'en em erbediñ ouzh Doue. E berr, se 'zo an izelded hervez an Aviel. Ar paour, hervez ar Bibl, eo an hini en deus ezhomm eus ar re all evit bevañ, evit dreistbevañ. An intañvez, an emzivad, an divroad, ar re a vev diouzh an deiz, ar re-se eo a gont war Doue. An hini eo eta a c'hortoz a-berzh ar re all hag a-berzh Doue. Rak an hini a zo war e walc'h, leun-chouk a arc'hant, a enorioù, a vadoù, a vennozhoù, a c'halloud, a ouiziegezh, hennezh n'en deus ezhomm a zen ebet. N'en deus ket ezhomm a Zoue. Ar baourentez avielek a zo ur speredelezh, ur vakted a galon e-ser Doue. Oc'h en em zigabestrañ eus hor c'hred touellus evit ar pinvidigezhioù. O

chom hep kendonianñ e-barzh ar pezh hon eus. Oc'h en em zistrobañ eus hor c'hoantegezhioù. O vezañ emouez eus hor berrenzezhioù, hor gennadurioù, hon dienez anienek.

En donig-don, ez omp holl dic'halloud da ober vad. Kement-se eo hor paourentez. P'hon eus santet an dra-se e ouezomp pelloc'h e teu pep tra eus Doue. Ur galon baour hag ur galon hegerz evit bezañ aloubet gant Doue. Daouarn ar paour a zo daouarn goullou astennet etrezek Doue d'o leuniañ gant e voud dezhañ. Groñs emañ ar paour e dalc'h an Aotrou ; klotañ a ra gant mennad an Tad. Ar paour a ra frankiz da Zoue da zont d'e garout ennañ.

Paour eta ez int hervez ar Gwenvidigezhioù, ar gerent hag a soñj pelloc'h eget briekadur hiniennel o bugale. Ha paour ez int ivez, hervez ar Gwenvidigezhioù, ar paotr yaouank hag ar plac'h yaouank hag a wel o dazont nann e doare da c'hounit muioc'h, da gaout muioc'h, hogen da ober o zrez dindan heol Doue.

A benn ar fin, koll kalon, dic'hoanagiñ a zo kontañ war hon nerzhioù-ni, war hor "pinvidigezhioù"-ni ha nann en em harpañ war reoù Doue. An digalonegezh, an dic'hoanag a zo chom hep asantiñ d'ar baourentez. Bezomp eta ur goulloder da c'hoantaat ul leunder. Dirak ar stivell, digoromp bras hor genou, da lavarout eo hon eneoù, dre ma ouzomp ervat n'hon eus ket peadra da derriñ hor sec'hed. N'eo ket paour an hini a glask ar baourentez hollek, dre boellegezh, dre amvevadouriezh. N'eo ket a-walc'h kennebeut en em santout paour e-mesk kaezhidi. An dalc'h eo bezañ paour o vezañ paour e Jezuz paour. Damheñvel outañ. Eñ hag a zo ken soubet en e garantez evit an Tad hag an dud maz eo peurluniet gant ar garantez-se. Ar garantez-se hag a zo anien eürusted, e wenvidigezh-Eñ. Nann ar baourentez.

Ar Bigouter

Brezhoneg-Studi : *J'ai fait un rêve agité*

Pep hini a ra, gwech-ha-gwech all, diwar ar pezh en deus bevet en derc'hent, kouskoù mat pe falloc'h. Ha dre maz omp beuzet gant ar galleg e teu dimp en hor spered troiennoù galleg, a seurt gant an hini a ya d'ober danvez ar pennad-mañ, a garfemp gellout restañ en hor yezh. Kavout un droienn a zo dija anezhi e brezhoneg a vefe ar gwellañ. Hogen pelec'h he c'havout e berr amzer ? Labour Ar Glew 10 levrenn, daoust pegen mat eo, n'eo ket a-walc'h, anat eo, ha n'eo ket hepken dre ma ne ro meneg ebet eus geriadurioù Imbourc'h nag eus pennad ebet eus ar gelaouenn pe eus embannadurioù Imbourc'h - pevar metrad hirder war un estajerenn -, en e oberenn, daoust d'ar vammenn builh³⁷ a droiennoù a vefe kavet sur-mat³⁸. Ober ar striv-se a

³⁷ Piv a lenno holl embannennoù Imbourc'h e sell da zastum an troiennoù-se ? Ne vefe ket aner, ha n'eo ket hepken evit-se pe evit deskiñ ar yezh ! Setu ul labour da ober gant neb a garo !... N'eus sekred ebet evit deskiñ ervat ar yezh : lenn kalz 'zo d'ober da dapout ul live yezh dereat, ouzhpenn komz, muioc'h c'hoazh evel-just, hogen teurel evezh 'zo d'ober ouzh an diforc'h a zo e kement yezh a zo, etre yezh lennek ha yezh pemdeziek (ha pa vefe « brezhoneg ar Sul » zoken, da lavarout eo c'hwennet un tammig gant ur brezhoneger mat war evezh eus ar pezh a lavar), ne c'heller ket dioueriñ ar c'hevala bet skrivet ha berniet gant hon diaraogerion, rummad-harummad, pergen abaoe ar Gonideg, hag a-raok (gw. Geriadur Istorel R. Hemon e 45 levrenn).

³⁸ Doue da bardono d'an Anaon, ha d'ar stourmer a zoare m'eo bet. Ret eo notiñ, evelkent, da glokaat pennad Paol Kalvez an niverenn diwezhañ, en deus kemeret perzh, e bedig-bed ar brezhoneg, en ur seurt *omerta* war labour puilh Imbourc'h, a zo gloazus evidomp, mantrus ha fall evit ar stourm emañ holl o ren, war dachenn ar yezh da vihanañ.

zo d'ober, war hor pouez ha bep un tammig, evel unan o sevel ur stêr a-enep ar froud, pe unan o sevel un ti hep bezañ war ar vicher, ha dindan un amzer diharak re alies... o c'houzout n'eo ket eñ nag e vugale zoken, a lakaio evit mat un doenn a zoare war o zi. Ma ! Hiziv e vo studiet³⁹ enta an droienn c'hallek « *J'ai fait un rêve agité* ».

N'eo ket mat chom dre ret war ar stumm en deus gwisket e galleg da c'hovelianñ un droienn a yafe mat dimp en hor yezh. An dra-se a ro « c'hwezh ar galleg » d'ar yezh re alies. Alies-kenañ, n'hon eus ket amzer : dispakañ hor soñj war ar prim 'zo d'ober, aon ganimp koll roud hor prezeg, dre skrid, ha gwashoc'h c'hoazh dre gomz. Un afer a dro-spered eo, a youl hag a labour ivez. Dre garantez ha dre zoujañs evit ar yezh. Hogen atav e vo gwelloc'h brezhoneg-saout pe 'podou' eget galleg, ha pa vefe 'podou' ivez, gallegaj, euzhus a-wechoù a zrailher amañ e Breizh – hag e pep lec'h moarvat e Frañs - war ar pemdez.

An anaoudegezh eus yezhoù all a c'hell kinnig stummoù all, a yafe gwelloc'h d'ar brezhoneg, met n'eo sur kennebeut. Hervez ho soñj e vo, bepred. Rak c'hwi an hini eo a varno e fin ar gont : c'hwi eo a raio gant an droienn hag her skrivio marteze zoken...

³⁹ Er pennad-mañ em eus lakaet i e-lec'h i, daoust ma n'eo ket e reolenn ar reizhskrivadur, dre ma klever re alies, div silabenn e-lec'h teir, zoken gant... skolaerion.

Klask an dra e brezhoneg 'zo d'ober. Prederiañ neuze. Kentañ 'zo d'ober neuze eo prederiañ mat. Gant hor skouer « *J'ai fait un rêve agité* », e vefe mat, marteze ha d'am soñj – ar pennad-mañ n'eo nemet un ambrougadenn a studi war an droienn-se am eus renet evit ur mignon - ober an diforc'h e brezhoneg etre ar c'housked e-unan hag an hunvreoù a reer, mat, fall, trubuilhus, pe turmudus... Daoust hag eñ ez eo an hunvreoù an hini eo a zo turmudek, pe ar c'housk e-unan a zo bet turmudek, diwar hunvreoù fall moarvat, met ma fell d'an unan menegiñ hepken en deus kousket fall a-benn ar fin : « Kousket fall 'm eus », a lavarfen, ken eeun ha tra. Ur yezh vourc'hiz ganet e saloñsoù ar « Sklêrijennoù » eo ar galleg, orbidus un tamm en abeg da se... « Ur c'housk turmudet 'm eus graet » ; « Turmudet e oa va c'housk an noz-mañ », hep komz a hunvreoù evit keloù-se enta, daoust ma reer an dra-se e galleg. Gouzout a reer a-walc'h ez eo turmudek ur c'housk diwar hunvreoù fall peurvuiañ... neuze, n'eo ket ret-holl ober anv anezho.

Ha, war-un-dro, klask a bep tu. En ho memor, pezh hoc'h eus lennet pe glevet, goulenn ouzh an dud a vever ganto - atav e vint plijet da reiñ un ali bennak -, un digarez ivez d'o c'hizidikaat war gudenn ar brezhoneg-podoù, war ar striv hon eus da ren holl a-unan da ziorren ar yezh evit ar vuhez a vremañ. Ar genrouedad a zo ivez. Ha neuze, ma n'eo ket bet kavet ho tra ganeoc'h evit c'hoazh, pellgomzit d'ur mignon desket, kasit ur postel dezhañ, savit ur goulenn d'ho kelaouenn muiañ karet...

Ha chom a ra ar geriadurioù evelkent ! Ar re voas : Vallée-an-difraoster, Hemon-ar-peurunvaner, Jul Gros-ar-gwriziennet, Favereau-ar-skolveuriad, Ar Glew-al-lenneg, Preder-dinec'h, Jil Ewan-ar-c'hovelier... Ar re arbennikoc'h ha war ar genrouedad : Diwan21, Ofis ar Brezhoneg, ha re all c'hoazh en amzer da zont... Evel ma lavar Youenn Olier e dibenn geriadur Jil Ewan, eo ret teurel mat evezh da chom hep implij ur ger pe un droienn

« arnevez », paz eus endeo ur ger pe un droienn er yezh.

Turiomp c'hoazh hor park : ma fell d'an unan pouezañ memestra war ar fed ma oa hunvreoù fall a durmude e gousk : "Ur c'housk turmudek gant/diwar hunvreoù fall 'm eus graet". Rak pa soñjer mat, ar c'housk eo a zo « *agité* » ha n'eo ket an hunvre e-unan na ra nemet dibunañ e istor, en un doare. « O vegañ hunvreoù fall 'm eus tremenet an noz », "Ur c'housk fall 'm eus graet o kas hunvreoù fall", hag all ... "Hunvreoù o deus c'hoariet en va c'housk" diwar J Gros : "hennezh a c'hoari e benn *il s'agite en criant*". Pe c'hoazh « Hunvreoù o deus c'hoariet ganin 'pad an noz/en va c'housk »...

Ha prederiañ adarre : gant an hunvreoù, peurliesañ, n'hon eus ket soñj eus ar pezh a zo bet hunvreet. Setu marteze e vo tra-walc'h gant ar c'hinnigoù a zo bet kinniget endeo. Met, maz eus soñj eus an hunvre, neuze, e soñj din e c'heller lavarout : "Un hunvre durmudek am eus graet" , pe, hiroc'h avat : "Malañ hunvreoù fall 'm eus graet an noz-mañ" diwar "malañ soñjoù". Pe "Magañ hunvreoù fall"⁴⁰ Da reiñ da gompren marteze e chom un draig bennak eus an hunvreoù, a chom displann en eñvor, darev da vont diwar hor soñj, pe c'hoazh : meur a dra a vefe bet huñvreet, e c'heller kinnig un dro-lavar evel « Meskañ hunvreoù 'm eus graet ». Diwar J Gros "Ar vugale-se a veske" *ces enfants là s'agitaient*. Met marteze aze e wean ar yezh betek re ? Daoust hag eñ ho pefe c'hwi un droienn all da ginnig ? Kasit ho soñj d'ar gelaouenn eta. Ha m'hoc'h eus ezhomm da dreiñ un dra diaes, skrivit dimp 'ta : un digarez e vo atav da vont donoc'h e studi ar yezh.

Tepod Gwilhmod

⁴⁰ Dre ar genrouedad e c'heller goulenn digant ur c'heflusker-enklask ha kavout lavarennoù a c'hell sikour kalz, evel « Pêr Mortolod, distro d'e vro c'henidik, a zo *maget e hunvreoù* gant skeudennoù maouezed », bet kavet o klask « hunvreoù war ar genrouedad dre « Google ».

Notennoù mesk-divesk

Kalon vat deoc'h da zebriñ !

Gant Ospital Villejuif Paris ez eus bet savet ur roll eus an adaozadoù a c'hell bezañ fall evit yec'hed an dud : krign-bev, bouzelloù lakaet diaes, kudennoù gant ar groc'hen, hag all. Lakaet hon eus sifroù an adaozadoù-se da heul, ur roll embannet gant "SOS CANCER".

E 102 (madigou "La pie qui chante", 110, 120 (Pastis Duval), 123, 124, 127, 131, 142, 150 (Picon, Martini), 210 da 213, 220 da 226, 230 da 233, 250, 251, 252 (kigerezh-voc'h), 311, 312, 320, 321 (kolesterol), 330 (burbu), 339 (Coca Cola, Breizh Cola) da 341, 400, 407 (en dienn-skorn), 447, 450, 461 da 463, 466 da 467 330 a zo an hini dañjerusañ (adkavet e vez e SCHWEPPE)

sitroñs, Banga, Canada Dry, kebell-tousegi a Bariz, Sezo AMORA, "La Vache qui Rit", etc.), 951 (Canderel).

Lod all c'hoazh ez eus diskred warno (n'eo ket prouet c'hoazh avat e vefent dañjerus evit an dud)

E 125, 131, 141, 142, 150, 153, 171, 172, 210, 212 da 217, 231, 232, 241, 338, 341, 460, 462 da 463, 465, 466, 477.

Lod all n'int ket dañjerus betek gouzout :

E 100, 103 da 105, 111, 121, 122, 132, 140, 151, 160 da 162, 170, 174, 175, 180, 181, 200 da 203, 236, 237, 239, 260 da 262, 264, 270, 280, 281, 287, 290, 293, 300 da 302, 304 da 309, 322, 325, 326, 331 da 337, 401 da 406, 408, 410, 413, 414, 420 da 422, 440, 470 da 475, 480.

Benead XVI en deus anvet da eskob le Mans ur Breizhad eus kumuniez an Emmanouel, an Aotrou Le Saux, eus Kistinid (Bro-Wened) ;

Eskob Kemper en deus nevez divizet adskoulmañ gant troniñ ar bersoned pa gemeront o farrezioù e karg ha pergen lennadur al lizher-kefridiañ, diskleriadur ar Gredo gant ar person, roadur alc'houezioù an iliz-parrez d'ar person nevez ;

D'an 11 a viz Here 2009 e vo lidet santelezhadur Janed Jugan e Roma. Bet ganet e 1792 e Konk-Aven, e varvas e 1879 goude bezañ bet gouestlet he buhez da Zoue dre ober war-dro ar re glañv hag ar gozhidi paour. Urzh « C'hoarezed bihan ar re baour » a oa bet diazezet ganti. Hiziv an deiz ez eus 6000 c'hoar engouestlet en urzh-se, e 300 ti dre ar bed, ha 52000 kozhiad herberc'hiet gant an urzh-se.

Tiegezh "ekolo" : hervez ar gelaouenn c'hall *Libération*, en dije kavet ar c'hannad amvevadour Yves Cochet an diskoulm d'an enkadenn armerzhel hag amvevadourel : o c'houzout ma skeudenn desaverezh ur bugel europat "ur c'houst amvevadourel par da 620 treug Paris-New York", e kinnig da zarbenn ur sturienn, badezet "*ec'hvel an trede kof*". Eilpennet e vefe skeul an adc'hoproù-tiegezh : hiziv, seul vui hon eus bugale, seul vui e toucher. Kinnig a ra e vefe kendalc'het heñvel evit an daou vugel kentañ, met digresket kalz ar skorennoù a-dal an trede

Naoned : teir moskeenn vras

War Daoudal info ar 16 a viz Ebrel, e lenner e vo savet teir moskeenn vras e meur gêr an Naoned, unan evit pep tuadur eus an Islam e Frañs : an Durked, an Aljerianed, hag all. Feurmet e vo an tachennoù marc'had mat-tre ha war hir dermen gant ar gumun a gellido ivez an hanter eus koust lodenn « sevenadurel » ar savadurioù-se anvet "*madrasha*" ; reiñ a raio ouzhpenn-se skorennoù d'ar c'hevredadoù hervez lezenn 1901 a gemer perzh er raktresoù-se.

Tremenvan Gwennole Ar Menn

D'ar sadorn 18 a viz Ebrel e voe douaret Gwennole Ar Menn en Drinded-Langoned. Mab da Herve ar Menn, nevez ar Biniou ha saver « Istor Hañveg », e kemeras perzh Gwennole Ar Menn e buhez an Emsav a-hed ur vuhez : bet e Bagad Bleimor, e klaskas e-touez traoù all sevel un drev vrezhonek e kostez Kemperle en e yaouankiz hag e voe lodek er gevredigezh « ABEG, Ar Brezhoneg Er Gêr », ur gevredigezh laik a glaskas bodañ tiegezhioù brezhonek ur poent 'zo bet. War-dro abadennoù skingomz ha skinwel en deus graet ivez, war danvez Breizh, ha kenlabouret en deus gant Roparz Hemon. Enklasker er CNRS war ar yezhoù keltiek, ha kelenner e Skol-veur Roazhon, e rene ti-embann « Skol », da embann oberennoù brezhonek digavadus. Gantañ e koll ar brezhoneg unan eus e labourerion. Joa d'e ene !

Homelienn obidoù Gwennole ar Menn, distaget gant Yann Talbot, a vo kavet er follenn distag ouzhpennet d'ar C'hannadig

An Emgav Chanter

ha danevelloù all

*Un dastumad a bemzek danevell gant Yann MIKAEL
Nevez-embannet gant IMBOURC'H*

Rakskrid gant Pierrette Kermaol
280 p. Moulet e ti Ouestelio Brest
18 € franko Breizh ha Bro-C'hall ; er-maez ar
C'hwec'hkogn 20 € – kaset ho chekenn da :
Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN

Trugarez d'an holl re o deus kaset o skodenn evit 2009 - en tu all da 12 € evit darn. D'ar re n'o deus ket graet evit c'hoazh, e lavaromp trugarez en a-raok, da reiñ dimp an tu da genderc'hel gant an ervenn voulc'het.

Mererezh

12 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h*. (15 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://kannadig.chez-alice.fr/>.

Skridaozerezh

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet

Homelienn e koun Gwennole ar Menn

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen, Mignoned ker,

Pa ran un tamm kilsell war an hanter kant bloavezhiad pe dost a zarempredoù gant Gwennole ar Menn e teu da'm soñj da gentañ hor c'hejadennoù e Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion, KEAV evidomp, e derou ar bloavezhioù tri-ugent p'edon o kregiñ gant deskin brezhoneg, ha Gwennole un tamm koshoc'h egedon stummet mat endeo war ar yezh.

Ha da c'houde, ha me studier, dibourvez a-walc'h, diarc'hant ha dileve, pa veze un dra bennak e Pariz, o lojañ e ti tad Gwennole, Herve ar Menn hag e wreg, gant mignoned yaouank all, ken divarrek ha me da feurmiñ ur gambr en un ostaleri gant ar paour-razh ma oamp. Na pet ha pet bloavezhioù kan ha koroll zo bet neuze er rann-di-se.

Ha war-lerc'h na pet ha pet a emvodoù labour hon eus bet a-gevret e Kuzul ar Brezhoneg pe en aozadurioù all, na pet ha pet kamp hañv hon eus tremenet ; ha neuze an degouezhioù ma oa un darvoud bennak da lidañ, rouesoc'h siwazh an darvoudoù evurus evel ur vadeziant pe un eured e brezhoneg en tiegezhioù ma oamp mignoned dezho hon daou.

N'em eus ket soñj avat hag-en em boa lidet eured Gwennole ha Garmenig na badeziant unan eus o fevar faotr. Kement em, eus graet em femp ha tregont bloavezhiad a velegiezh ken en em veskont em eñvor ; met kalz stankoc'h siwazh e kejemp evit darvoudoù glac'harus, evel hini hiziv, obidoù hor mignoned kumun aet da Anaon, dam anezho kalz re abred. Dont a ra da'm memor an obidoù hon eus bet kemeret perzh enne, an Aotrou Armañs ar C'halvez, an Aotrou Klerg, an Aotrou Loeiz ar Floc'h, Gwilhern Dubourg, Glenmor, an Itron Denez, Anjela Duval, Ronan Huon, ha kalz a reoù all n'em eus ket mui soñj.

Ur gwalldaol bepred evidomp gant taol ar marv pa gollomp unan hon eus anavezet, karet, doujet, unan hag en deus labouret a-zevri evit ar yezh, ar sevenadur, evit ar vro evel hor c'heneil Gwennole. Pebezh koll bep tro, pebezh toull kleuziet dirazomp, peseurt mark ouzhpenn o tigeriñ evidomp.

N'eo ket al lec'h amañ nag ar mare d'ober ar gont eus al labour skiantel war ar brezhoneg kaset da benn gant Gwennole a-hed e vuhez, e studiadennoù prizius, e embannadurioù, e alioù fur ha pervezh war ar yezh reizh. Muzuliet hon eus

bet endeo talvoudegezh ar pezh en deus bet sevenet; hen muzuliañ a reomp bremañ, ha muzuliet e vo muioc'h c'hoazh gant ar rummadoù tud da zont.

Met e varv ken trumm ha dic'hortoz evidomp en deus hor sanket en un dristidigezh don, ni hag a gare anezhañ, ha va c'homzoù, c'hoant am befe e rofent un tamm skoazell, un tamm frealz, esperañs ha sklerijenn da gentañ d'e dud-kar, d'e diegezh, ha dimp-ni holl.

Ar wezh diwezhañ din da gejañ gant Gwennole e oa e Kawan, e Bro-Dreger, d'ar Sadorn 21 a viz Meurzh diouzh ar beure evit digoridigezh levraoueg vrezhonek Kuzul Meur departamant Aodoù-an-Arvor. Ne oa ket em soñj en deiz-se em befe ranket ren liderezh kañv e obidoù teir sizhun war-lerc'h.

Met evel-se eo e tro rod ar vuhez, ha den ne oar na deiz nag eur e zisparti. Pa glevomp ar c'heloù eus marv unan hon eus anavezet ha karet en em lakaomp alies da brederiañ war ster ar vuhez hag ar marv. Ha kement-se petra bennak ma vefe hor Feiz, pe hon douetañs, pe hon digredoni.

Peurvuiañ ne soñjer ket e se pa ya an traoù war an tu mat, pa c'heller mont ha dont e-lec'h ma karer, pa c'heller ober ar pezh a garer. Bevañ a ra an nen a zeiz da zeiz, evel-se war c'horre ar gwagennoù, hep en em c'houlenn betek re da belec'h hor c'has red ar vuhez ; bevañ a raer didrabas hep ober re a c'houlennoù war hor planedenn, hon tonkadur. « Gwelet e vo diwezhatoc'h » a soñjer, « pa vo amzer... »

Gwir eo hon eus kalz a soursioù pemdeziek : al labour d' ober, an traoù da brenañ, da werzhañ, hon darempredoù gant an amezeien, hor stourmoù er c'hevredigezhioù ma'z omp ezel, ar vugale da sevel, ar garg-man-karg da seveniñ...

Neuze ez omp douget da zaleañ ar goulennoù diazez war ster ar vuhez. Ha lavarout a ra an nen ennañ e-unan : « Un deiz bennak e vo prederiet war se ha klasket un hent. »

Met pa vezer tizhet gant marv unan tost pe unan kar, marv ur mignon, ne c'heller ket tremen a-gostez eur ar goulennoù, ar c'hudennoù diazez-se. Lakaet omp dirake, war-eeun : da betra e servij hor buhez, da betra e servijomp, pep hini ac'hanomp, hag-eñ he deus hor buhez, hon tremen war an douar-mañ ur ster bennak, perak e teu ar marv da skeiñ warnomp, hag-eñ ez eus ur

vuhez all, un esperañs evidomp en tu-hont d'ar marv, pe neuze eo an netra, ar fin penn-da-benn, ar peurzistruj klok hep dazont ebet ?

Hag en em c'houlenn a reomp ivez : peogwir emañ ar marv aze, e pep lec'h en hollved, daoust hag-eñ e c'hellomp bezañ evurus ur prantadig bennak, daoust hag-en e c'hellomp reiñ un tamm evurusted ivez d'ar re all, daoust hag-eñ e c'hellomp lakaat ar bed da vezañ un tamm kaeroc'h ha reishoc'h ?

Kalzig eus hor c'hempredidi a soñj dezho goude-holl n'he deus ket hor buhez-den, buhez Mab-Den, muioc'h a dalvoudegezh eget hini ur preñv, ur vuzhugenn pe ur valafenn. Aze emeur evit un nebeut bloavezhioù, kollet e diventelezh ar c'hantvedoù, kantvedoù a-raok dimp ha kantvedoù war hol lerc'h.

Ar re o deus un tamm fiziañs e dazont gouenn an dud a responto koulskoude : « Met ni a zo tud, paotred, merc'hed, gant hor poell, hor spered, hor gouiziegezh, hor soñjezonoù. Krouet, savet hon eus sevenadurioù, treuzfurmet ar bed, ijinet ardivinkoù efedus, dizoloet sekredoù an Natur ; savet hon eus kêrioù, impalaeriezhoù, rouantelezhioù, kemmet dremm an douar, merket hor roudoù e pep lec'h. Trec'het hon eus war ar c'hleñvedoù, lakaet zoken da gilanaoer ar marv. »

Ha neoazh, en ur brederiañ betek don-donañ an traoù, ha ne c'heller ket lavarout a-benn ar fin kement-man ? : « Mar n'omp evel tud nemet marmouzien un tamm muioc'h dispaket hepken o empenn hag o zeod, daoust hag-eñ e vefe ken gwallreuzus-se ma yafe gouenn an dud da get war an tamm douar-man ? Ar bed ez eus bet anezhañ abaoe miliardoù a vloavezhioù hep na vefe tud ennañ, hag e c'hellfe derc'hel da vont war-raok, da dreñ hepdomp, e-pad miliardoù a vloavezhioù c'hoazh. An douar a zalc'hfe da dreñ en-dro d'an heol n'eus forzh penaos, ha bez e vefe bepred ar stered, al loar, hag an astroù all en oabl glas. »

Neuze, daoust hag-eñ n'eo ket dav goulenn kement-mañ : ha ret eo e vefe tud c'hoazh war an douar en amzer da zont ?

Kalzig eus hor c'hempredidi a soñj dezho n'he deus ket buhez Mab-Den ur ster gwirion : aze omp dre zegouezh emeze, kemer a reer poan, ha ne zeu disoc'h mat ebet ; a-wezhioù e vez un tamm eurvad met ne bad ket. Darn o devez poanioù kriz ha ne welont diskoulm ebet.

Daoust hag-eñ e talvez ar boan neuze bezañ graet eus e wellañ er vuhez, bezañ bet bamet dirak kaerder an traoù, bezañ krouet oberennoù,

bezañ treuzkaset ar vuhez d'ar rummadoù nevez, bezañ savet bugale, bezañ karet Doue, bezañ karet an nesañ, bezañ rentet servij d'ar re all ?

Mar n'hon eus ket muioc'h a amzer da zont war-lerc'h hor marv eget hini ur valafenn, ur preñv pe ur vuzhugenn, neuze daoust hag-eñ n'eo ket hor buhez nemet ur c'hoari droch, didalvoud, diskiant, ur jestraouerezh diboell, ur cholori evit ur gweneg toull...

Setu aze goulennoù a sav en hor spered dirak darvoudoù skrijus ar vuhez.

Ha daoust hag-eñ o devez ar Gristenien ur respont bennak da reiñ da gement-se ? Ya 'vat, a-dra-sur, ur respont o deus, an hini roet gant Jezuz Krist e-unan.

Lavarout a ra dimp hiziv c'hoazh : « Me eo an hent, ar wirionezh hag ar vuhez. An hini a gred ennon, zoken ma varv, a vevo da virviken. »

Ne ouzomp ket tre penaos e tremen an traoù en tu all eus ar bed a welomp. Met krediñ a ra ar Gristenien ez omp bet krouet diouzh patrom ha heñvelder ouzh Doue, korf hag ene, gant hon oberoù mat ha strivoù hor buhez a heulio ac'hanomp e bed ar splannder lugernus. Ha gant se, kement tra talvoudus en deus bet graet Gwennole en e vuhez a vo saveteet ivez a-unan gantañ, ha prometet d'ar c'hloar beurbadel. Netra ne vo kollet eus e labourioù hag eus e boanioù. Hon dever eo hepken kenderc'hel war e roudoù ha heuliañ an hevelep irvi da doullañ war park bras hor yezh hag hor sevenadur.

Peogwir eo Doue, buhez hag eurvad, peogwir eo Eñ, Doue, ar Vuhez hag an Adsav, e vezimp ni ivez trec'h evel an Aotrou Krist war an dizesper hag ar marv. Ma asantomp mont da heul Jezuz ha bevañ hervez e spered, e tiskouezo dimp an hent a gas d'ar pal. Lakaomp eta hor fiziañs Ennañ. Amen.

Yann Talbot

An Dreinded-Langoned, Sadorn 18 a viz Ebrel
2009